

ken plaen evel m'emañ !

+

D'ar 17^{vet} Here, un darvoud fall zo degouezhet en traou hon c'helaouenn : Gloazet kriz eo bet abEnnez hon fenn-skrivagner, gant un tankarr. Emañ astennet en un ospital evit nouspet deiz.

Menol mut e-keit-se ? Daoust hag unan bennak a van en Arzhon ?

Amañ e krogomp gant kudenn ar menozioù : E-pad m'emañ abEnnez war sav, "Gwenedour", e dra, a van dindan e veli. Bremañ eo tonket d'ar rener, d'e dro, reiñ, diwar e venozioù, pep sklaerañ eus labour e galon. Teurvezit, lennerion, digareziñ ma n'emañ ket troet antelloù hemañ, war du an hevelep skiantoù anat da henez.

Da abEnnez, hon gwellañ hetoù ! Ra vo pare dizale ! ra vo dezhañ un adnerzh da drec'hiñ war ar boan hag an Hiraezh... a greiz kalon !

+

Morse ne grefe ar re a anav mouler Gwenedour pegen abaf a zen zo anezhañ; abaf awalc'h evit bezañ chomet hep embann, loulz lârou, netra diwar e bluenn-eñ; ha se en askont ma vez barnet re griz, gantañ, e venozioù-eñ ! Rak tonket eo d'an denig-se ar menozioù an taerañ... kemmesket gant an doujañs ar c'harantezusañ, e-keñver kalon pep tra vev, ha da gentañ-holl, kalon an dud.

C'heazh m'en doa graet e soñj bevañ didudet, en toull donnañ ur gourenezig, n'eo ket bet eñ evit serriñ e dor da nikun; ha n'eo ket rouez gwelout eno "enebourion" e-kichen mignoned an Emzav. Tudu Arzhon, int ivez, o deus kavet, prim, hent e beniti ha frealzus eo spurmantiñ e c'hell an unan bezañ ur wezh an amzer, profed en e vro ! Sur-mat, ma vije bet ken "jentil" tud e vilajenn c'henñik, biskoazh ne vije bet ret dezhañ kemer hent an harlu en 1945 !

Ha setu hon dister-a-zen, hilgennet gant e daer a venozioù, diouzh un tu, ha gant e soñjoù ken-garantezus diouzh un tu-all ! Kentoc'h eget ober droug, emezhañ chom hep droukskrivañ !

+

Ar Gelted a zo bet diouzh ar re gentañ etouesk pobloù hon rak-istor, o c'hellout meizañ "traou ar vro" ! Nag un estlamm, neuze, gwelout Bretoned, hag int kelted, moarvat, dont davvezañ ken diseblant evel m'emaint, dirak kudennoù o stad !

Ac'hanta, gouzout e reer pelec'h eo marc'het ar rod : "Traou ar vro" hag ar politikerezh zo daou dra disheñvel : Pa zegouez d'ur vro bezañ gwasket dre heg, gant un impalaerezh, evel m'eo c'hoarvezet gant Breizh, tamm ha tamm eo e vez kri-gnet war he frankisoù gant an trec'hour. E-pad 300 vloaz o deus gallet Breujoù-Breizh stourm war dachenn ar stad; hogen, goude ur reveulzi euzus, spered diaoulek an impalaerezh, en go abaoe pell, en deus trec'het war eneoù ar bobloù gwasket; ha dreist d'ar gwirioù, dreist d'ar c'horfoù, diouzh ret, astennet en deus e veli betek mougañ an disterañ termadenn, betek lemel koun an ene : anv ur vro, anv Breizh.

"Quiconque abaisse, c'est qu'il est bas" eme Saint-Exupery : Spontus izel e tle bezañ neuze, henneh a ven izelaat ene ur vro, betek ma ne vo netra ken anezhi !

Ya ! Aet eo mac'homerezh an impalaerezh betek aze : Ne oa ket awalc'h bezañ mestr, ret 'oa mougañ ! Gant pezh a oa douar hon bro, graet zo bet "departamantoù"; n'eus ken a Vretoned : N'eus nemet finisterianed, tud eus ar "c'hodunor", morbihanezed, tud an "ilevilên", loaradlañtiked ha me-oar-me ? Anv ebet eus Breizh dirak e "lezenn".

Aes eo kompren, neuze, pegen dibosupl eo d'ar Vretoned dont da benn da vezañ selaouet en stumm ebet; Aes eo kompren e tiwan follentez-an-droukranz en askre an abafañ hini ! Arabat da nikun barn an dud, darn eus an Emzav, o deus soñjet, gwech pe gwech, aozañ armoù gloazus da vadaouiñ hiniennoù diouzh kostezenn ar mac'homer ! Nebut a dalvoudegezh en devez gwad skuilhet (nemet hini ur merzher e vije) ! Ez-vev eo e c'heller bezañ oberiant, gant ma ne vaner ket da dermal ha da soñjal hepken (ar pezh a gred din n'am eus graet me ken,

siwazh, bete-vremañ) !
Met petra ober ?

...da gendroc'hel...

BREIZH:

Klask a reomp 1 den en pep
parrez evit reiñ doomp keleier war
bezh a c'hoarvez en Breizh, dreist
holl evit traou a van diembann gant
ar c'heloierion gallek.

Prouet awalc'h ez eo ne vez em-
bannet netra a-bouezh e-sigur hon
bro gant pep brasañ eus ar c'haze -
tennoù, o vezañ m' ez int doujus
tra-ken d'an Impalaerezh.

"AR BED KELTIEK"

a ro da c'houzout,
bep miz, en hon yezh, diwar benn an
traou pouezusañ c'hoarvezet er Bed,

- RA VO MEULET !

hogen ret bras eo bremañ kaout ur
folenn oc'h embann ken alies hag e-
zhomm, en hon yezh, ar pezh a c'ho-
arvez en Breizh !

RA VO KASET DEOMP ETA,
HEP GORTOZ,
KELEIER EUS AR VRO !



Hon niverenn da zont:


"VA ZROTTIG"

gant Andreu Lichtenberger

pennad I. En E. Bezh
+++++

Trott, kent dezhañ bout dihunet,
a glev en e greiz : "Nedeleg eo" ha
raktal sed-eñ digousket. Buan o sav

oooooooooooooooooooooooooooooooooooo
Periodique depot leg. CPPAP N°41411
Direct & imprim H; Hillion 56 Arzon
Abt. 1 an : 5 F CCP Rennes 120 68



G W E N E D O U R




va
Zrotty

g a n t

Andrev Lichtenberger

Pennad I



Troet gant abEnnez

ANDREV LICHTENBERGER

V A Z R O T T I G

troet gant abEnnez

Pennad I

N E D E L E G

Trott, kent dezhañ bout dihunet,
a glev en e greiz : "Nedeleg eo" ha
raktal sed-eñ digousket. Buan e sav
a-lamm eus e wele m'az eas dec'h
ken gorrek da gousket ennañ, da
zezev dezhañ ne vo ket biken an
deiz arc'hoazh, mall warnañ e red
davet ar siminal m'en devoa lakaet
e ziv votez velen dirazi. Ur garm a
zeu gantañ ha, bamot, e van difiñv
en e sav : un taboulin, ur c'hleze,
ur fuzuilhenn, peder boestad soud-
arden, madigoù, daou levr skeuden-
noù, ha me 'oar ? ha pep tra evit
Trott... E-kichen an nor, emañ e
vamm war-c'hortoz hag eñ da bokat
a-fonn dezhi, laouen an tamm anezh-
añ. Dre vriataat e lavar-hi dezhañ:

- Digant ar mabig Jezuz eo'h eus
bet kement-se.

Anaout mat a ra Trott ar mabig
Jezuz, ar skeudenn anezhañ en dous
bet gwelet. Bihan eo avat evit kas
an holl traou-se, ha penaos e
c'hell menel ken livrin e groc'hon
goude endevout tremenet dre gement
-all a siminaloù. A-unan gant grad-
vat Trott e sav e veuleudi hag e
drugarez deol. Neozh, mall zo war-
nañ em ziduiñ gant e deñzorioù
nevez.

Emañ Jane, ar saozez vat, o
tigeriñ ar stalafioù, kaer e anezhi,
dre ar prenestr e teu tre heol Ni-
ce, e-tal an ti e vez ar mor o
c'hlasaat, levenez zo en aer hag

en amzer; levenez a ra ivez kalon Trott gant un devezh Nedeleg ken skedus. Diaes eo gwelc'hiñ e zremm ha lakaat e zilhad dezhañ; diaes eo e lakaat da zebriñ. Ha goude, detu eñ en e goazez war al leur, e-ki-chen mammig, e holl gakaerigoù gantañ. O zreiñ a ra, o distreiñ, sellout oute e kement keñver.

- Na c'hoant em bije, emezañ trumm, e vije va zadig kaezh er gêr!

Huanadiñ a ra mammig da eilgomz. War vourzh ul lestr bras emañ aet tadig; merdeiñ a ra du-hont, poll-poll, en tu-rall dar bellenn grenn.

Un taol galverez ouzh dor an ti! Jane a zeu tre, un torkad bras a vleunioù ganti hag ur furlukin brasoc'h c'hoazh. Da vamm ez a an torkad ha da dTrott ar c'hoariell, tra ma lavar Jane :

- A-berzh an Aotrou Aaron.

Bamet eo mamm gant al levenez, ar ruzion a sav d'he dremm a guzh er bleuñv. Trott n'eo ket laouen. Droug ennañ, e sell a-gorn ouzh ar c'hoariell. Divourrañ a ra gant an Aotrou Aaron. Pinvizik-mor eo an Aotrou Aaron-se; kenedus eo, yaou-ank eo; bepred e vez hegarat ouzh Trott; meur a wezh en deus e gaset da vale en e garr gant mammig; reiñ a ra madigoù dezhañ hag ober outañ "va mignon". Hogen ne blij ket da dTrott; re a-lies e skrap e vammig

dioutañ; lies gwezh pa zeu en-dro diouzh ar valcadenn e wel an Aotrou Aaron azezet en he c'hichen hag e vez kaset a-benn-kaer trema Jane. Yusev eo ouzhpenn an Ao. Aaron ha gouzout mat a ra Trott ez eo ar Yuzevion o deus bet lakaet ar mabig Jezuz da vervel pa voe bet bras. Kounaat a ra Trott ur skoudenn ma weler warni ar C'hrist war ur groaz. En e gichen emañ un den ur sac gantañ a denn d'an Ao. Aaron. Moarvat ez a an Ao. Aaron d'an oferonn: Yuzev eo avat! Teroza, ar geginerez, henn lavar, ha Trott a sav a-du ganti... Ha reizh eo dezhañ ober lid ginivelezh Jezuz.

Mamm a gomz :

- Na kaerat ur c'hoarigell, va Zrottig! Da vourbouañ a ra an Ao. Aaron, e gwirionez!

Kalet ec'h eilgomz Trott :

- Ne vourran ket ganti!

Blejal a ra mamm ha mouliñ par ma c'hell ar c'hoariell. Grignous e selaou Trott ha lavarout :

- Ur fri kromm ha diharak zo dezhi, heñvel ouzh hini an Ao. Aaron; ne blij ket din!

C'hoarzhin a ra mammig hag ober goap ouzh Trott. Skoet eo hemañ ha ne rann grik. En doare da sevel enep, e laka ar c'hoarigell he fri divalav ouzh ar voger, ha bep an amzer e taol ur sell gourdrouzus outi.

Hogen Trott ne bad ket e imor fall gantañ. Unnek eur a son. Poo-gwir ez eo deiz gouel ez a Trott d'an iliz gant e vamm. Gwiskañ a ra e vantell he gouzougenn voulouz, e vanegoù melen kaer hag e dog nevez gant seizennoù; levre pedennoù eo vamm zo gantañ hag e kerzh en he c'hichen. War dreuzoù an iliz e teu un den d'he saludiñ. An Ao. Aaron an hini eo. E drugarekaat a ra mam-mig evit e gasadonn. Trott, eñ, ne ran ger. Digarez a c'houlenn mam-mig evitañ hag evit frealziñ an Ao. Aaron, en e bed da zonet da evañ te ganti, diouzh an endervezh. Droug ha chif zo gant Trott; ar wezh kentañ eo e c'hoarvez kement se. Laouen-kenañ eo an Ao. Aaron, tremen a ra e zorn en e varv ha mouskomz da vammig traou hegar a ra dezhi gwenne'hoarzh ha sevel ar ruz d'he dremm.

Koulskoude ez aer e-barzh an iliz. Azezañ a ra Trott ha selaou gant feiz, en e galon, ar c'hanaouennoù, al lidadur, ha prezegzenn an Ao. Person. Dres, emañ an Ao. Person o tanevelliñ penaos e c'hanas ar mabig Jezuz etre an azenn hag ar vuoc'h; komz a ra ar-zivout e fin-vezh poanius ha gourc'hemenniñ d'an dud, a-barzh dougen bri d'E ouel, ober plijadur d'ar re-rall ha dreist pep tra d'ar beorion ha da re uvel.

Lonket en deus graet Trott kom-zoù an Ao. Person ha fromet meurbet emañ e ene gante; kreskiñ a ra ennañ e gasoni ouzh ar yuzevion hag ouzh an Ao. Aaron; karantez vras a sav dezhañ ouzh ar mabig Jezuz ha c'hoant en deus he diskouez oc'h ober diouzh lavar an Ao. Person. Aze avat emañ an dalc'h : re vihan eo Trott evit ober plijadur de hontez; profoù en deus graet an holl hag eñ n'en deus mann da brofañ. Piv a ve-fe izoloc'h pe baouroc'h egetañ a c'hellfe reiñ dorn dezhañ hiziv.

En ur zistredañ d'ar gêr ez eo prederiet gant an divoud-se. Komz a ra e vamm outañ. Klevout ne ra ket. Neoazh e sav e benn pa glev ur plac'hig vihan azezet war al leurgêr e-kichen un azen glas, an dibr warnañ; gwezh a vez e vez laosket Trott monet da ober un tamig tro gantañ... Narenn, Trott ne day ket hiziv.

Hinnoal a ra an azen d'e saludiñ hag ar plac'hig a sko un taol-liad gantañ evit ober dezhañ tevel. Doaniet eo Trott gant kement-se ha setu ma splann an traou en e spered. Hag-eñ nemañ ket ar mabig Jezuz o tiskouez dezhañ hemañ izel da frealziñ? E-touesk ar re en deus kejet Trott gante n'eus nemet an azen a gement a dremen hep lidañ gouel an Nedoleg; n'eus nemetañ a van hep bout deder. Un azen hag ur vuoc'h,

en o c'hichen emañ ganet Jezuz. Trott ne anavez buoc'h ebet, un azen avat a anavez, un azen hañval ouzh hini en deus gwelet ar mabig Jezuz o c'hencel. Ha piv 'oar hag-eñ n'eo ket eñ an hini eo. Kozh-douar eo, gouez da dTereza. Fromet ha laouennaet eo Trott; mezhus eo un tammig avat da vout savet war goin an hini zo bet marteze kentañ kama-lad ar mabig Jezuz.

Dre ma tebr, Trott a wel en e spered petra a c'hello ober. Goude merenn ez a mammig d'he c'hambr. Lizheroù he deus da skrivañ hag en em fichañ da ober a-benn degemer an Ao. Aaron. Achap kuit a ra Trott ha redok war-du al leurgêr, c'hoant gantañ goulenn an azen ha reiñ dezhañ un tamm eus an dibenn-pred manet war an daol. Ar plac'hig a gav mat dezhi reiñ an azen da dTrott hag o-daou d'ar gêr. Trott en ambroug end-azoù ha, daoust d'e hiraezh, hep krediñ lakaat tizh warnañ pa zegouezh dezhañ menel a-sav evit kas ur geliouenn diwar-dro e gof blouc'h. Leuskel a ra an azen dirak prenestr ar sal-debriñ ha lavarout dezhañ : "gortoz !" ha setu-eñ gant mall o vonet d'ar sal-debriñ. Siwazh dezhañ, distallet eo bet gant Loeiza tra ma oa er-maez; n'eus ken mann war an daol. Bara a c'helfe awalc'h Trott monet da c'houlenn er gegin, hogen anat eo dezhañ e rank

ar vadelezh bout kuzh. Divourrus eo Monet a ra d'ar prenestr ha gwelout an azen er porzh. An azen a zav e fri ha pilpasat da nesaat, drant un tamm anezhañ. A-sav e van dirak Trott, doare warnañ da sellout gant souezh ha, polloc'h, gant tamall; petra ! ur spi kamm zo bet lakaet dezhañ ? hag an azen da deurel e sobez en ur vlejial par ma c'hell, evel evit ar beure. Dic'hoanag ha tamall eo ar garm-se, anat da dTrott. Sovel a ra an daeroù d'e zaoulagad. Hag-eñ ne vo ket evit reiñ un draig bennak da gencil ar mabig Jezuz ?

Ha setu ma wel, dreist d'ar siminal, en ul lestr kaer, bleuniou an Ao. Aaron, hag a-novez, evel evit ar beure, e sav ur mennoz dezhañ; meizout a ra e ranker plijout d'ar mabig Jezuz en ur gastizañ unan eus e vourrevion hag en ur ober plijadur d'e gencil. Kalon un abostol dezhañ, e pak krog en tor-kad, e lamm trema 'n nor, e tifaragoell gant an diri hag e tegouezh dirak an azen. An azen a c'hwosa ar bleuñv da gentañ ha kregiñ e zant enne. D' e c'hrad int. Digorkaer e veg, laouen-meurbet e galon, e sell Trott outañ. Ne glev ket prenestr ar sal o tigeriñ ha ne spurmant ket e vamm a zo douet goude he devout klevet hinnoadenn an azen, a - benn gouzout petra

'dremen.

- Trott, petra 'rez aze ?

Trott zo divamet en un taol. Sevel a ra e zaoulagad. Krizet eo he zal gant mammig ha taetaet he mouezh. Trott, aon un tammig gantañ, a van difiñv.

- Deus tre a-benn-kaer ha degas din an torkad-se.

Un druez e welout, Trott a zistro d'an ti hag e ro an dilerc'h eus ar bleuñvennoù dibennet. Ur c'hlemm a zic'hoanag a laosk mammig.

- Va faourkaezh bleuñv, o Trott, penaos ec'h eus graet evit o lakaat er stad diharak-mañ ?

Glac'haret-bras eo Trott.

- Evit sevel a-onep an den mat-se, an Ao. Aaron, hag ober poan din eo ac'h eus graet kement-se. Paotr-fall ! Labous divalav !

Trott, trevariet, a valibous ur gomz bennak.

- C'Hoant am boa ober plijadur d'an azen... Lavaret en devoa an Ao. Person e ranker bout prederiet gant ar re izel... Ne ouien ket e karec'h kement-all an Ao. Aaron.

E-loc'h distanañ Mammig, ar bomm dwezhañ-se he lakaas da beurdaeriñ :

- Ne garañ ket an Ao Aaron, plijout a ra din, va c'hrod ervat, ha se zo da lavarout : ur c'heneil eo.

Hag hi da c'hourdrouz adarre gant Trott, ken garv, ken kalot, ma

tarzh e galon d'ar paour kaezh bugel hag a ra lamm d'e zaeroù. N'eo ket teneraet mammig evit kelo-se; e gas a ra d'ur c'horn eus ar sal, o c'hourc'hemenn dezhañ, rust he mouezh, ober peoc'h ha tremen hep amiotaat a-nevez "mar gell".

Re eo evit Trott. Kuzhat a ra e benn en e zaouarn :

- Mamm, mamm, biskoazh n'hoc'h eus gourdrouzet kement all ganin, ziken p'am boa torret ar vedalenn bet roet deoc'h gant Tadig kent dezhañ monet war-raok.

Ha difronkal a ra ken e tifronk. Emañ pell o leñvañ; diskredik e teu da vout; ne gred ken nag er vad nag en droug, e douellet en deus ar mabig Jezuz, disleal eo an azen, doan en deus graet d'e vammig, gourdrouzet eo bet ganti, a! kement! kement! Un huanad a sav d'e c'houzoug n'eo ket evit mirout outañ.

- Trott, eme ur vouezh, kemm bras ganti.

Trott ne gred ket sellout.

Va Zrottig ! eme ar vouezh, kuñvoc'h c'hoazh.

Trott a dro un nebeudig e benn, laka sav d'ul lagad, hag a wel e vamm o vousedhoarzhin outañ. Ne hañval ket bout konnaret, tamm ebet, mammig.

- Deus da bokad din, va Zrottig, emezi. Ha mouskrenañ a ra he diweuz.

Em deurel a ra Trott en he di-

vrec'h; e lakaat a ra hi war he
barlenn ha pokat a-fonn dezhañ.
Serriñ a ra Trott e zaoulagad hag
em leuskel da vonet gant un espar a
drugar. Pa zigor e zaoulagad, e wel
ez eo iskis a-walc'h e vamm. Hag-eñ
en defe he c'haloniset adarre hep
gouzout dezhañ?... Met n'eo ket,
setu e vamm o wennc'hoarzhin hag o
tastum torkad an Ao. Aaron :

- Foei, emezi, mar deo kollet,
kement-all eo echuiñ gantañ; kas
anezhañ da'z azen ma vo peurzebret.

Difraeañ a ra Trott; levenez a
ra e galon.

- Pa ne vo ken anezhañ, eme e
vamm kent dezhañ tremen an treuzoù,
deus da glask ul lizherig emeon o
vonet da skrivañ d'an Ao. Aaron
evit e bediñ da chom hep donet hi-
ziv; droug-penn am eus. Mont a ri
d'en kas da unan gant an azen.

Diouzh an noz, e vamm e-kichen e
wele, e lavaras Trott e bedenn,
evel boaz. Ha pa zistagas ar bomm
" Nhon laoskit ket da vout touell-
et, hogen gwarezit-ni diouzh an
droug ", e kouezhas un dra bennak
klouar war e dal. Trott avat ne
glevas netra; kousket e oa a-gent.

DIWEZ AR PENNAD Iañ.

Dépôt Légal effectué CPPAP N°41411
Direct & Imprim H. Hillion 56 Arzon
Abt. 1 an : 5 F CCP Rennes 120 68


N 22



Rumm B

07 02 1966



G W E N E D O U R





Odil vihan a c'hoarie ken sioul ha tra war c'hlann ar stêr, pa ziflukas trumm, Doue oar a-belec'h, moarvat eus al lec'hidieg, un doare gurlazeg ramzel. Sailhal a reas warni, digor e o'harvanoù.

Yudadenn glemmus Odil vihan a zedennas evezh ar vagerez, a oa he holl freder kuntuilh fœon en ardremez. Ha setu holl... Nemet e voe kroget Odil vihan ha brevet e pemp felpenn ha c'hwec'h jelkenn, tra ma sec'he ar vagerez diwar he zreid, hep dont a-benn da chaokat ger na da ziskargañ daeraouenn, taget ma oa gant an darvoud. Evit a sell ouzh daeroù, ar c'hurlazeg hepken a ziskargas dioute, un hanter-gelorniad ac'hoel, war a leverer, n'eo ket daeroù di-c'haouiñ, daeroù goiñ pe gentoc'h daeroù dic'hoiñ ne lavaran ket.




(hevezh: CORIC)

Ar pezh a chomas diouzh Odil vihan a voe hec'h anv, staget ouzh ar c'hroger ramzel ha didru- ez, gant barrennig pe get, barr a zaeroù ne lavaran ket.


A-c'houde an darvoud doanius- mañ, ar gurlazi braouac'hus-se a vez lezanvet gant Breizhiz 'krog- Odil' ; ar C'Hallaoued avat o deus kemmet un tamm ar ger ha graet diouzh an anv-gwan-mañ un anv-kadarn, pa lavaront 'krokodil' na mui na maez. Rev ar miled-se o vezañ dianat a-walc'h, ha nikun o vezañ c'hcantaet sevel o lostoù, diouzh un enklask skiantel, krok- odil a ran ur ger gourel hepken. Ne vez staget arouez lies ebet ouzh Odil, ar pezh a ziskouezfe n'eus bet kroget met en hon Odil deomp-ni.

Doanius a-walc'h eo an danev- ell-mañ evit bezañ gwir-bater hag hon tadoù o deus kizellet a-lies ouzh treustier hon ilizoù kozh geolioù gurlazi krog-odil, lakaet eno e pinienn.

Klevet em eus bet kement-se gant ur sakrist kozh ha kabac'h,



glan ha feleun, ha zoken medal- ennet gant e eskob. Ha me a zo amgredik gant gred, evel m'on bet ganet, Tregeriad ma'z on hag all, n'em eus graet met stagañ ouzh an danevell wirion-mañ ar sturiad hael-mañ, ken gwirion all :



- Trugarez dit, Tonton Jul, evit da brof kaer

- O ! va faotr bihan, ne dalvez ket ar boan komz eus se, un dra dister e oa

- Me 'lavare se ivez, Tonton Jul, met mammig a felle dezhi e vijes trugarekaet memestra.

A.D.

- Tadig, a c'houlenn Dede, perak ur gwaz n'en deus ket ar gwir da gaout met ur wreg ?

- A ! paotrig paour, pa vi bras e kompreni penaos zo ranket ober ul lezenn evit diwall ar re n'int ket gouest da'n om ziwall o unan.

A.D.

Ar G.I. Joe a dreuz leurenn ar c'hamp. Ar jeneral Eisenhower, na zoug arouez ebet eus e garg, a dremen d'an ampoent.

Joe a huch warnañ .

- Hello, Boy ! Selaou 'ta, n'ac'h eus ket un tamm tan da danañ din va butunenn ?

Eisenhower gant ur mousc'hoarzh fentus a ro dezhañ e c'houlenn hag a zalc'h gant e hent.

Ur c'hamarad da Joe en deus gwelet an abadonn. Lavarout a ra dezhañ gant piv en doa afer.

Joe, pennfollet, a red da gaout ar jerenal da c'houlenn digarez.

- O ! eme Eisenhower, n'eo ket grevus da bec'hed. Met selaou va faotrig : diwall ez errufe kement all ganit gant ul letanant bemak.

Añjela DUVAL



" AN TESKAD AOUR "

Kinniget eo Meneg Meur ar Brezhoneg "An Teskad Aour" da Jakez KONAN evit e obereñ 'Nobl-añs', Al Liamm, niv. 107.

"An Teskad Aour" ivez da Añjela DUVAL evit hec'h obereñ 'Traouigoù dudius', Ar Bed Keltiek, niv. 76.

"An Teskad Aour" ivez da Erwan GWEGENN evit e obereñ 'Devezh an hini kozh', Preder, Tonkad 64 niv. 58.

TUDENNOÙ BUHEZVA BREIZH

Ha speredek eo Nolwenn.

Hegarad eo Nolwenn bepred dar-
eo da zegemer an dud ha da vezañ
degemeret. Mar hoc'h eus eshomm
un dra bennak, Nolwenn a raio he
weizh gwellañ evit ho skoazellañ.
Gouest eo da labourat un nozvezh-
pad evit ober ur stammenn da
baotr un amezegez klañv. Ur
plac'h a galon vat eo. Tud zo a
lavarfe emañ he c'halon war he
dorn. Me lavar emañ en he spered.

Rak - ur 'rak zo - n'eo ket
speredek-kaer Nolwenn gaezh (kamm-
-ed n'eo deuet a-benn da zeskiñ
brezhoneg a-zoare !) - hogen
c'hoantaat a ra tremen da spered-
ek. Mar degouezh deoc'h kejañ
ganti e c'houlenno trumm ouzoc'h :
- Ha neuze, lennet hoc'h eus rom-
ant diwezhañ Y. O. ?

- Ya 'vat. E zastumad danevelloù
a fell deoc'h lavarout.

- N'eo ket. Ur romant an hini eo.
Koun reizh an eus e tremene an
istor e bro-Indez. Klevet e vezo
zoken frond ar rezeda diouzh komz
-où ar skrivagner meur ; gwelet e
veze an aodoù dantelezet ; kar-
et...

- Se n'eo ket romant Y. O. !

- O ! pa lavaran deoc'h, e hini
diwezhañ... Ho tastumad danevell-

où an eus lennet daou vloaz zo.

Ur wezh e teuas ganti ar bomm-
mañ : 'Pep tra zo bet lakaet amañ
gant blaz ar mad ennañ'.

- Blaz an droug.

- N'eo ket. Koun reizh am eus eus
komzoù abEozen.

- AbEozen ! diouzh Maodez Glann-
dour e vije kentoc'h.

- N'eo ket ! Skrivet en devoa
Fañch Debovez kement-se en ul
levr en deus bet dediet din.

- Me 'gave din e oa gant abEozen.

- O ! paotr kaezh ! Anat eo e oa
abEozen anv-barzh Fañch Debovez
am eus anavet mat !

Diouzh he c'hlevout, he devije
lennet kement tra skrivet e brezh-
-oneg (zoken traou an dazoned am
eus aon !) hag anavet-mat pep
skrivagner

Ur wezh edo o tebrifiñ e kichen
L..., unan eus hon gwellañ skriv-
agnerion. Divizout a eure hemañ e
sigur e levr da zont. 'Kanvaz ar
Baradoz kollet'. Ha setu ma te-
govezh ur nevel gant ur plad leun
a hilienn. Hon paourkaezh L...,
lañset gant e ziviz, a skoas un
ilinañ ouzh ar plad ma strimpas
an hilienn dioutañ war dilhad
Nolwenn.



O ! emezi, laouen on : evel-se
em bo saotrennoù oberour ar 'Bar-
adoz Kollet' da ziskouez da'm
c'heneiled.

31.05.'65

abEnnez

Keloù a c'houlenner digant tud
dianket pellik zo, kollet o chm-
lec'h ganimp goude hon devout
kemeret re a flipoù war-lerc'h ar
gripoù :

Aela an DOAN

Adela SEITE - an DOAN

Job an DIBOAN


Ifig an OAN

Ludivig KERVOAN

O deurvezet kas keloù deomp.
G.-S. Poent bras eo deomp plediñ
gant toulloù zo, c'hoazh ma vez
graet ouzhimp ur wezh ouzhpenn
'hejerion-o-zoull (où)'.

G.-G.-S. Petra 'ta zo c'hoarvezet
gant ar c'harr-mignon bras aet da
sammata un toull (bras)

G.-G.-G.-S. Da Ifig an OAN :
" Mar ne fell ket dit, Ifig, e
vije lakaet da anv, betegouzout...
laka un anv dizan(a)v ".



Toull lous ! Toull lous !

N' eus ket war ar bed,

Gwelloc'h evidout

Da vezañ ka^ret.

U n H e j e r

K A E L G E R I O Û

A - HED : 1- Evel ma vez komzet e Kernev, gouez da dud zo.
 2- tevenn traezh. meur a hini a ya d' ober ur frazenn. 3- mat. nep doare lec'helezh anadennel.
 4- keuneudenn. dorn kembreiz. 5- a lakaer en-dro d'an tal.
 6- dont da velen. 7- a c'hronna an douar. 8- o flusk zo liv an argant.

a b k d e f g h

1								
2								
3								
4								
5								
6								
7								

A - SERZH : A- evel ul laouenan. B- ar c'houer a oar en ober. 'kasaus eo' eme egile. K- Dozvet eo ar yar ! oksidenn etil. D- a c'hell bezañ ur marc'h evit Breizhiz zo. E- anv-badez latin F- naen lemmañ. G- kreskiñ a-galz.

abEnnez.

abEnnez a lavar amañ trugarez d'an holl re o deus skrivet dezhañ goude e wallzarvoud (Gw. 20) Laouen eo o kemenn dezhe ez eo gwellaet mat an traou dezhañ. Ur penn-bazh avat a rank kavout evit kerzhout. Spi en deus e vezo pare da vat a-benn an hañv...

T R O T T

d a z i s v a n k a ñ :

Tra ma oa abEnnez er c'hlañvdi ez eo bet embannet pennad kentañ 'Va Zrottig' : n'eo ket bet enta evit adwelout an amprouennoù. Setu amañ ar pep pennañ eus ar mankoù manet er skrid :

p 3 l 18 dre E vriataat

p 5 l 20 da vourboNañ (moumounañ)

p 7 l 1 lonkañ en deus graet

l 11 en deus GANT


d 1 bout Seder

p 8 d 4 ouzh AN hini

p12 l 7 he c'haloniZañ


R' hon digarezo al lennerion !

diskoulm kaelgerioù pajenn 10



a b b d e f g h

1	S	A	V	A	R	I	Ñ	
2	E	R	I	N		G	E	R
3	D	A		E	G	O	R	
4	E	T	E	V		L	A	V
5	R		T	A	L	E	D	
6		M	E	L	E	N	I	Ñ
7	A	E	R		O	N	N	



G w e n e d o u r Périodique
inscrit à la CPPAP sous le N° :
41.411 - Dépôt Légal Effectué -
A b o n n e m e n t 1 an = 5 F.
Copyright by :
Directeur & Imprimeur: H. Hillion
56 A r z o n CCP Rennes 120-68

§


N 23

Rumm B

01 04 1966

G W E N E D O U R

Pennskrivagner : abEnnez



K A E L G E R I O Û

	a	b	k	d	e	f	g
1							
2							
3							
4							
5							
6							
7							

A - H E D :

- 1 - a lakaer ouzh an troad.
- 2 - levrenn eus ar Bibl
- 3 - en-dro dezhañ e tro ar rod - roue kozh.
- 4 - ger nac'hañ.
- 5 - daouad sonennoù - rannig nac'hañ.
- 6 - elfenn dredanvec'hiet.
- 7 - evel ar gwin aet da drenkenn - tra kuzh.

A - S E R ZH :

- A - evit nac'hañ - sonenn.
- B - d'ur bugel.
- K - dreist e saozneg - deroù an orjalenn.
- D - arouez Iwerzhon.
- E - e-barzh - stlejvil.
- F - ezel kemmet - raganv.
- G - pa gouezh ar maen warnañ, paour kaezh anezhañ - gwez.

a b E n n e z

(diskoulm war bajenn 12)

Toull-Mir, 22.02.'66

Ifig kaezh,

ur souezh eo bet da lizher, goude ma kave din e oas sanket e Toull-Onn hep fiziout dont da'm gwelout e Toull-Mir. Ha keloù ebet diouzhit, un toullad mizioù zo ! Feiz 'vat, paotr, krediñ a-walc'h am bije graet e oas interet (bev pe varv). Pezh zo diogel neoazh eo ez out dasorc'het (eus a varv pe eus a vev, n'ouzon doare).

Me ivez zo dasorc'het goude m'eo bet darbet din mont da welout paotr an tu all, hep rak na perak da lavarout dezhañ. Me 'lavar dit ne zle ket bout un drugar tremen evel-se hep kaout goar nag amzer da brederiañ war e donkadur.

Te avat, o prederiañ war va hini, hep aotre na darbenn diouzhin, ez aes un tammig pell. Droug ha fach a-walc'h e c'hellez bout ganin, pa rankfen-me en eskemm henn bout ganit pa ne skrives ket din !!!

Ha deuet e vijes da'm interamant ?! Penaos 'ta ez pije gouvezet e oan marv pa'zon bev... ha

neuze pa'z on bev perak em bije lavaret dit e oan marv. . ha pa ne'm bije ket kaset keloù dit dre an Telegramm o vezañ ne oar henn-ezh poz brezhonek ebet... Ouzh-penn-se na pellgomzad, na pellskrivad, na lizherad ebet ne vefe aet dit eus va ferzh pa oa dianket ganin da chomlec'h goude keit-all na'z poa ket skrivet din !

Ya, paotr kaezh, oilpennañ a rez an traou. E gwirionez, tourtet eo bet va fenn a-dreñv (va lestr kentoc'h, mar karan... bout seven), hogen n'eo ket diouzh doare da zanevell. Ur c'harr all an hini eo zo deuet da skeiñ em hini. N'on ket kouezhet en un toull evel da geneil Fulup Silzig - Doue d'e bardono - pa ne oa na toull na fozell ouzh va hent. E gin savet d'an nec'h an hini on bet - ha n'eo ket d'ar Gwennved m'henn lavar dit - p'eo bet harpet va c'harr a-serzh ouzh ar c'hleuz. Te, war a zanevellez diouzh ac'h eus klevet (an hini a wallglev a wallavar a laka gaou e lec'h ma kar, evel ma leverer) - te a zegas koun din eus Jobig Kerzroch en hent-houarn na ouie kanned hag eñ eo a boste pe ar gwez !

Da Fulup Silzig, eñ, zo evel ar paotr a gavige un toull-karr da

koude choukañ en e chakod.

D'ar mare-se n'eo ket an toullou a rae diouer e Brest goude ar bombezadegoù, an torr-pilhoù, ar bazh-houkañ hag an holl diaouleri o devoa graet o reuz war ar baour kaezh kêr toullet-didoullet evel delioù fav koad Keryav. Un darn vat eus an toullou-se e oa tu da dennañ ur mad bennak dioute ; gant un tammig fichañ hag aozañ e teuent da vezañ kavioñ dereat ma ne oa d'ober met sevel warne tiez diouzh c'hoant ar brenerion ha reolennoù reizhkêr.

Da gentañ, hag e-pad ur pennad mat, e prenas Fulup an toullou e lec'h ma edont, e save an ti warne, ha dav d'ar marc'had tiez Bastet d'ar re gentañ e teuas da gaout afer ouzh tud figusoc'h a felle dezhe sevel o zi war o douar dezhe, zoken pa ne oa toull ebet ennañ. An tisavourion all a gleuze ; Fulup avat a oa finoc'h. Mont a rae da brenañ an toull a vent ma oa ezhomm diouzh an ti e lec'h ma edo, ha digant e berc'honn. Ne laere netra. Daoust dezhañ bezañ fin n'oa ket onestoc'h den war an douar.

Ur pikol sammgarr en doa, ha daou pe dri gwaz gourdonet mat da bakañ an toullou. Diouzh an noz e teue gant e sammgarr hag e tegase

an toull d'al lec'h ma oa an ti da vezañ savet. N'eo ket ponner tamm ebet, tra m'eo goullo evel-roizh. Pa'z eo leun n'eo ket heñvel.

Bremañ, ar c'hirri-tan n'int mui evel ar c'hirri gwezhall-gozh, soñj ac'h eus ? En deiz all em eus gwelet unan c'hoazh, hag ur bern abon o tivogediñ war e lerc'h ; darbet eo din gouelañ gant ar c'heuz. Mat, arabat din lezel va spered da wakaat. An tangirri, a lavaren dit, n'int ket evel ar c'hirri kezeg ; ar gwall- eur a red war o lerc'h hag arabat harpañ mar ne fell ket deoc'h bezañ tapet. Ar wirionez- se, kelennet gwerz zo gant hon henñadoù, Fulyp en ankounac'haas un deiz. Ha gwazh a se e voe evitañ.

Prenet en doa e Lambezelleg un toull brav-tre, na re vras na re vihan (diaesoc'h eo digreskiñ an toulloù re vras eget brasaat an toulloù re vihan) sonn mat an tu- ioù dezhañ, ken sklat ar goueled ma vije bet lavaret e oa hanter daret, don dres diouzh ma oa ezh- omm, ha marc'had mat souezhus ouzhpenn-se.

War-dro dek eur noz e oa deuet enta gant e sammgarr da gas gant- añ an toull. Sammet e oa bet war

ar c'hastell karr hag arrimet mat gant funioù. Un tammig torrodus e oa an hentoù d'ar c'houlz-se ha gwezh an amzer e trelamme an toull en ur storlokat war ar c'harr. Edont o tiskonn straed Paris etre- ezek an Harteloire pa glevjont un todilhon spontus goude ur stroñs- adenn washoc'h eget ar re all. Gant al lañs e rejont ur pemont (50) metrad bennak c'hoazh ha... neuze harpañ da welout ar pezh oa c'hoarvezet. An toull an hini oa ; an toull ne oa mui war ar c'harr. Kouezhet e ranke bezañ war an hent ; setu an todilhon o devoa klevet. Gant an noz teñval ne oant ket evit gwelout ; ne oant ket evit treiñ kennobout gant an enk ma oa ar straed ol lec'h-se. Ne c'helle ket bezañ pell avat , hag int war gil da glask o zoull, da glask ar marv a zlefen kentoc'h lavarout... Kriz e galon nob na ouelfe o welout pegen bihan dra eo an den war an douar-mañ a zacroù hag eñ e barr e nerzh, hag eñ ar poellekañ hejer toulloù.


Kilañ a rae ar c'harr etrezek e donkadur hag a-daol-trumm : poudouroun ! talabao ha fardiglev Kouezhet ar c'harr en toull a oa manet e kreiz an hent. Doue d'o fardono ! Antronoz e voent kavet o zri. N'ouzon ket gant piv e voe

lammet an toull. Unan kaer e oa.

Un den kaer ivez e oa Fulup Hotiñ a rafen e vofes hoñvel outañ, bremañ m'eo aet da anaon, gant ma tiskouezfes an hevelep doujañs hag eñ da'm c'hizidigezh. Rak eñ, un den deskot, un embregour saver-tiezh, un den pivizikmor, hag a oa kenderv d'an aotrou maer e Kornoaled, eñ avat, ker-kent ha ma varvas, a gasas keloù din dre an Telegramm, ma'z ajen da welout lakaat en douar e furm douarel ha tremenidik. Gwir eo, te n'out ket marv ; gwolet e vo petra ri en hevelep plegenn.

En ur c'hortoz an deiz gwenvidik-se, degemer, me az ped, va c'henciliezha a-viskoazh.

Ifig an OAN.



- Pet toull ha pet toullez zo ac'hann da Vontroulez ?

- Ezhomm ebet da c'houl peogwir n'eus den hep e doull !
(poblek)

Toull-Onn 14 02 '66

Paour kaezh Gwion, fachel on ganit. Ha me ur c'heneil dit, ur breur koulz lavarout, ha te o vont da vreviñ da revr hep kas keloù din nag a-raok nag a-c'houde ! Prestik em bije ranket mont d'ar vered hep gouzout nag evit petra nag evit piv ; kasaus eo, te oar, an interamantoù zo trist a-walc'h evel-se. Ha neuze, war a glevan ez out aet da dourtal un tangarr all gant da hini ? Ha n'eo ket aet ar maout ganit ? Ar faout avat an hini eo ? Ma, klev 'ta, paotr, plijet e vijen bet evel-reizh o vont war da vez gant ar re all, met peogwir emhout bremañ war ar pare eo koulz din ober van a netra ha kas dit va hetoù kalonekañ. Ur wezh all, taol pled da gas din ur ger bennak mar az pes amzer a-raok lonkañ da chaok

Marteze e keit e oas en ospital ec'h eus klevet komz eus ur c'heneil all din, Fulup SILZIG e anv ? Marvet eo n'eus ket pell goude ur gwallzarvoud un tammig evel da hini, war-dro 1950 an hini a oa, ha ken iskiz oa an taol

a c'hoarvezas gantañ ma rank bez-
añ bev c'hoazh e danevelleg an
holl ospitalioù. Embregour saver-
tiez a oa. E Kornoaled. Nann ?
'peus ket klevet ? Hennezh a oa
ur c'hwil avat. Arc'hant bras zo
aet gantañ pa'z ae an traou en-
dro e Brest goude ar brezel o
sevel tiez. En ur werzhañ e re un
tammig gwelloc'h marc'had eget e
genseurteù e kave tu navitse da
c'honit muioc'h egete. Nemet n'eo
ket dour-chag a oa en e benn, ij-
in an hini eo.

Goude ar brezel, te oar, eo e
teuas ar c'hiz e Breizh da sevel
an tiez war gav. Yac'husoc'h eo,
a lavarer. Ha gwir eo, an darn
vuiañ eus ar re zo aet da vevañ e
tiez digav, abaoe ma'z eus tud
war an douar, zo aet da anaon,
pell zo. Ha neuze, pep ti zo ret
kleuziañ ar c'hav a-raok sevel ar
mogerioù tro-dro ; ul labour
spontus gant ar reier zo dindan,
an doureier, an douar zo e-barzh,
ar gwrizioù zo da droc'hañ, hag
an h o l l atredoù da gas kuit.
Na koustus, koustus kenan eo, hep
kontañ an amzer gollet. Ma, kavet
en doa Fulup an tu da espern an
darn vuiañ eus al labour-se hag
ar c'houst anezhañ. Dre se e
c'helle gwerzhañ o diez gwelloc'h
marc'had eget ar re all ha kouls-

zigaviañ un toull saout (pe un
toull maout, marteze...) E giz
toulloù torr-pilhoù ar gêr a
Vrest, un torr-revr eo da Fulup,
a-benn an diwez. Perak ivez
kouezhañ diwar lost ar c'harr, pa
vezer un den dosket hag un om-
bregour saver-tiez war ar marc'h-
ad. Paour kaezh Fulup, evitañ
kennebeut n'eo ket 'blounioù hep-
ken a oa e pleg brec'h an Tonkañ
evitañ' liz d'hor c'hencilez
Aela an Doan pa'm boa bet va
gwallzarvoud...

Bremañ em eus fiziañs ez out
deuet da zeveizout penaos eo
c'hoarvezet ar gwallzarvoud-se
ganin. Ur wezh all, Ifig a garant-
ez, kemer preder un tamm gant da
c'herioù pe neuze... neuze laka
toulloù ez lizher da vout leuniet
ganin, Diwall avat ne savfe da ger
hevelep kargañ toulloù, rak, ovel
ma ouzez - ha ma ouie da embregour
saver-tiez Ifig Silzig - ponner e
vezont pa vezont leun.

Boz, buz ha buhez dit, ha taol
meiz da doullañ war un teñzorkent-
añ ma'z po ur gwallzarvoud ivez.

Kev' a-berzh holl dud Toull-Mir.


Gwion Diboaniet.

Embannadurioù
"GWENEDOUR"

Rumm "B" : Brezhoneg Unvan
Rumm "G" : Brezhoneg Ereg
Rumm "A" : Keleier Arzhon
(e galleg)
Komanant da bep rummad 5 F

Rumm "E" : Embannadurioù :
G. TOUBLANC :
Le Traité d' Union
(9 levrenn) 13 F
Le Druidisme 3 F

YELLEN :
Perc'hindour 6 F
(keinet) 10 F




a b k d e f g


1	B	O	T	E	Z	
2	N	I	V	E	R	O
3	A	H	E	L	R	I
4	N	A	R	E	N	N
5	N	N	N	A	O	
6	I	O	N	E	N	N
7	E	G	R	R	I	N

G w e n e d o u r Périodique
inscrit à la CCPAP sous le N° :
41 411 - Dépôt Légal Effectué -
A b o n n e m e n t 1 an = 5 F.
copyright by :
Directeur & Imprimeur : H. Hillion
56 A r z o n CCP Rennes 120-68


N 24 Rumm B 15 09 1966




G W E N E D O U R




Pennskrivagner : abEnnez



Kamp
Logivi



Mann n'eos ket
 en Breizh,
 Mann n'eos ket unan
 Mann n'eos ket ur
 Gamp
 Evel en hor c'hamp



Kamp Logivi

157 : sed aze niver an dud bet o kantren e Logivi-Plougraz (Treger), davet Kamp ar Vrezhonegerion.

Arnevez-oc'h-arnevez eo deuet ar Vrezhonegerion da vezañ. Fellout a rafe dezhe dour tomm d' em welc'hiñ ma vefe anezhañ. Da c'hortoz e oa gant dour yen hepken (hogen rik ha pur) eo e rae ar vugale hag ar wazed ; ar merc'hed e oa evelkent un du-ellenn dour tomm evite-holl...: setu perak e ranke an darnvuiañ anezhe tremen gant dour yen ivez.

A-hend-all, ar c'hafe ne oa gantañ tamm blaz kafe ebet, hini chikore ne lavarar ket. Pennoù bras er c'hamp o doa heuliet prim skouer Priñsig Koad-moc'han ; hennezh avat a veze aozet kafe rik dezhañ en Hotel, er vourc'h.

Netra da lavarout ouzhpenn war an died ! Ar piz bihan, da skouer, a zeue eus liorzhan Aotrou Kadored, rener Skol Sant

Jozeb, ur brezhoneger dispar anezhañ ha n'eo ket bet kontet e-touesk ar 157 niveret er penn kentañ.

Arabat ankouaat an niver bras a gonikled hag a yer bet aberzhet evidomp, hag a zeue ivez diouzh desaverezh an Ao. Kador-ed.

Al listri a veze skolpet mat gant 5 kampad bennak, dibabet e mesk ar re naetañ, bep ma tegouezhe unan er c'hamp. Ne lavaran ket e teue ar re em gavet kent da vezañ re lous !

Bez' e oa aze peder sal-skol. Unan anezhe evit degemer an dud nevez, evit an emvodoù hag evit skol an Trec'h Kentañ.

Bamet e veze an dud a zegouezhe eno e-pad ar gentel oc'h arvestiñ ouzh ur skoliad ken yaouank ken ne gerzhe ket c'hoazh nemet war e grabanoù. Hogen ne oa met mab ar c'helenner : Brieg-Iwan e anv, o krabisellat en-dro d'ar bankoù hag o tastum ar muiañ ma c'helle a gozh paperioù holl e brezhoneg evel-reizh.

Bez' e oa ur bern taolioù-mouezh ha pouezioù-bouezh ; da skouer :

- pouez - mouezh elektronek bulldozer ar brezhoneg gant Youenn Olier ;

- hini Roazhon gant gwim ar gêr-se, pebret ha holenet ur wezh ar mare gant brezhoneg titi-paris al lerned yaouank ;

- hini Spagn gant un harluad bet 20 vloaz en Ekuador ;

- hini al luoz ken taer ha ken nerzhus gant an Aotrou Souffez (deuet da vezañ 'soufflez' evit tud zo) ;


- hini Rusia a vezo bet mat-eze ar pep bravañ, deyezhekaet gant Gwennola Kaouissin, ganti gerioù iskis hag iskriv, hogen saourus, levezonet sur a-walc'h gant ar pep kaerañ diouzh a c'heller dastum en tu-arall d'ar stign-houarn evel ar 'pior' a dalvez da 'beuc'h' (e Treger ac'hoel) - evel c'hoazh 'stotañ' a dalvez da dostaat ouzh un iliz difennet dre baper ;

- hini Kanada, un drugar d'ar galon, ken tost m'emañ ouzh hini Treger ;

- an hini saoz ivez, o kev-eziñ gant hini Roazhon, an eil pouezet war ar vouezhiadenn zi-wezhañ hag egile pouezet war ar vouezhiadenn gentañ ;

War a weler, ne hañval ket Naoned he devout he fouez-mouezh dezhi.

- Pouezioù-mouezh reizh a oa ivez eveljust, bep an amzer, gant Leoniz, Kerneviz, Gwenediz ha Tregeriz.



Nebeut a-walc'h a folk-klore ha gwell a-se ! Ne vane neuze met tud vev hag en o ampartiz.

Gourc'hemennoù e-leizh hon defe d'ober. Da gentañ evit temz spered kardek an holl gwitibunan.

An Itron de BELLAING a c'hell bezañ lorc'h enni o vezañ kaset d'e benn unan ouzhpenn eus an 19 Kamp -- plijusoc'h c'hoazh marteze eget boaz. Eilet eo bet gant bri ha klod hag ivez gant an Ao. SOUFFEZ, ur rener dispar ha plijus anezhañ.

Ivona KONAN he doa ur sell ken ampart war bep tra, hag ivez ur mousc'hoarzh hegarat evit pep hini na vezer ket prest da ankouaat.

Herve KONAN, atav a greiz kalon e levenez o ruilhañ kaer e-mesk c'hoarzhadeg vras war gement hini, zo da vezañ sellet outañ evel ur skouer d'ar vrezhonegerion kent ha da-zont.

Alan al Louarn (kadour gwezhall)

- Pelec'h e c'hello bezañ spurmantet Englev an Tiegezhioù gwelloc'h eget **amañ!**

An ao. Souffez :

- Ar peoc'h a vo ?




Arabat dimp tremen hep lavarout hon bennozh da 'baotred ar c'hoariva' :

An Aotrou Doktor ROPARZ dreist-holl en deus kaset un hunvre gozh da wir, evit brasañ trugar ha dudi ar Vrezhonegerion : ur c'hoariva margodeennoù an hini eo. Anzav a ranker eo deuet kaer gantañ ar merc'hodennoù savet gant arz ha karantez e-doug ar goañv tremen. Levenez a c'hell bout e kalon an den mat ha trugarez a sav outañ a-berzh an holl re o deus arvestet ouzh e c'hoariva.

Alan ar BERR, gouestlet nozvezhioù hir gantañ o prientiñ dremmourion an Intañvez Barv Glas. Disgwelout a reomp ar faziouigoù deuet gante, evit gwelout hepken al labour sevenet, an amzer aberzhet, ar skuizhnezh dastumet, kounaat n'int ket tud a vicher ha neuze e vo reizh-mat ha dellezek ar gourc'hemenoù a reomp oute a wir galon. Laouen e c'hell bezañ Alan ar Berr gant un taolarnod disoc'het ken kaer.

Pêr.I. MOIGN en deus strivet evel pep bloaz da zeskiñ kanaouenoù nevez d'un ugent bennak a dud. Evel boaz, eo deuet da vat o zeir kanaouenn gant al laz-kanañ, a-drugarez d'e rener

Ar Post, gwelet gant an Ao. SOUFLEZ !



ampart. Kalon ha hoal-vat dezhañ da zerc'hel paol ar stur evit boemañ c'hoazh ha c'hoazh dre ar blijadur ar Vrezhonegerion a zeuy d'ar c'hamp paneveken evit gwelout frouezh e labour kalonek.

Koulmig KERLANN a oa bet fiziet enni ober war-dro ar vugale. Hogen, c'hwi oar, n'eus ken a vugale, na pa vefent brezhonegerion. Hon re-ni zo bet ken diaoulek ha ken safarus hag o zud ma n'eo ket muioc'h !

Anat eo neuze n'helle ket Koulmig Kerlann hec'h unan dont a-benn d'o damesaat. Anat eo ivez e vije bet reizh kavout dek pe daouzek Koulmig all, na ve ken met evit skoazellañ, rak spontus eo ar gwim !

Ret eo enta reiñ ur meneg 'mat-tre' (mat penn - da - benn) d'ar paotr yaouank Yeun Courves e anv, en deus kemeret warnañ kenc'houzañv he merzherinti gant Koulmig .. Ra vefont trugarekaet o daouik. Ha ra vo ar vugale da zont doñvoc'h eget ar re a-vremañ, o Santez Anna venniget !

Ha peogwir n'eo ket eñ a skriv ar baperenn-mañ, hardizh dimp ! 'Meulodi tregeriek' d'ur gwenedour en deus pleustret en a-raok, e-pad, ha marteze goude,

war bep tra. Gwion ar MENTEGER hini eo, ken aketus evel m'eo bet da lakaat brall war gloc'h bras ar c'hamp, hag all, d'an eur rekis ha rik, hag a-raok zoken.

Kuit da farsal, ret-mat eo, en anv pep hini, trugarekaet an Aotrou KADORED, da vezañ hon galvet da Logivi, prientet ar skol -dour e kroc'h ha pep trastaliot an taolioù a-benn pep pred hag ur bern madoberoù all diniverus ha diwelus marteze.

Menegiñ a ranker ivez Maria, ar gegineroz, he deus graet tan ha kegin, o brezhoneg penn-da-benn ha prestet ur gontell vras da eil gwaz an intañvez barv glas. Ha pa soñjer en hec'h eileroz, ar vaouez eus Breizh-Uhel, a responte ' ya! ya! ' hag a gomprens pep tra a-benn ar fin.

LEVEZON AR C'HAMP

WAR AR SKOLIDI

Levezon ar c'hamp a vo bet ken bras ken eo ret lezel pep hini da drugarekaet :

- an Aotrou SOUFFEZ en deus desket an diforc'h etre bezañ ha kaout hag ur bern traou all d'ar re nevez deuet war studi ar brezhoneg ;

- Gwennole ar MENN, en deus

desket troioù lavar bev ha buhezek da skolidi an trec'h kentañ ;

- Gwion ar MENTEG en deus roet kement a skrivadennoù hag a strivadenoù da skolidi ar skol etre ken e tleont skrivañ difazi a-benn bremañ. (Gwazh a-se evidon-me paour, ma ne'm eus ket heuliet e gentelioù !)

- abANNA vras ha kement kelenn-er dileuriet gant SADED o deus kelennet er skol uhel war danvezioù ken liesdoare, yezhadur frammadel ha Mao-Tse-toung en o zouesk.


LEVEZON AR C'HAMP

WAR DUD LOGEVI

Ret e oa em veskañ gant an dud e-maez ar c'hamp evit gwelout pegen plijet e oa an holl gwitibunan e Logivi, gant tud ar c'hamp hag o brezhonegoù. N'eus ket bet kollet gante an distersañ poz deveret diouzh hon genaouioù, hag int sebezet pa veze lavaret dezhe ne oamp ket holl eus ar 'finișter'!

Gwerzhet ez eus bet dimp, e brezhoneg, kartennoù-post, died gwestell ha betek segalennoù ! Em veskañ a rae an dud kozh ha yaouank ganimp en ostalerioù, ha nikun n'eo bet sellet outañ gant Logiviiz evel un estren bennak.

Ra vo meulet Logivi. _ 12 _



LEVEZON AR C'HAMP

WAR AN AOTROU PERSON

Hervez klevet, ne vije bet netra d'ober evit kaout oferennoù brezhonek gant Aotrou Person Logivi. Ac'hanta, goude en devout spurmantet kalonegezh ha dereadegezh pep den er c'hamp, en deus an aotrou Person e-unan aotreet lavarout an oferenneveure, ar sul kentañ, en iliz-pabrez.

An eil sul, e oa an oferennbred ganimp. Hag ar meurzh goude e voe digoret chapel gaer Sant-Ivi evit lidañ oferenngañv Emglev an Tiegezhioù.

Bernioù tud eus Logivi, evel-reizh, a oa deuet d'an oferennoù brezhonek.

Ar RADOM

Hervez ma'm eus klevet, daoust ha n'eo ket bet degemeret ar Gampidi - e brezhoneg, mar plij - e Radom Plouveur-Bodoù, e-pad un hanter-devezh ! Ha se hep paeañ ! Hag aotreet zoken da vont el lec'hioù kuzh ma n'eo ket aotreet an dourisked !

Bennozh da Renér ar Radom ha d'an daou ijinour (unan anezhe eus Lanuon !)

UN DARVOUD ISTOREK POUEZUS

Un drugar hep he far eo bet da bep hini gwelout er c'hamp, - selaouit ervat - an tri faotr

yaouank bet bac'het e Sant-Nazer ! ~~E~~, lennet mat hoc'h eus. Didamallet eo bet hon 3 faotr hep bezañ barnet !

Gant hevelep keloù, e kredomp degas levez e kalon pep breizhad.

Mennout a reomp, a-berzh Gwenedour, ober hon gourc'hemenoù d'an tri den-mañ evit o c'halonegezh ha lavarout dezhe hon eus kendruezet gante abaoe o bac'hidigezh

Ur bern traou all a vefe da lavarout :

Piv enta n'eo ket bet fromet gant yezh ha mennozioù an Ao. CHAUVIEL, ur gwir varzh, hag eus Logivi ! Mar deo e levezon war e amezeion par d'an hini en deus war ar Gampidi, n'eo ket souezh neuze e van ken taer paotred ha merc'hed ar vourc'h, e keñver Breizh hag ar brezhoneg

Ha piv enta a zegase gwestell ha gwin mat war bep taol ha diwar e yalc'h ?

Daoust ha n'eo ket bet gwelet skeud Ifig an Oan ?

Daoust ha n'hon eus ket kejet gant Aela an Doan pe ouzh Adela Seite-anDoan.?

Daoust ha ne vano ket leun-barr kalon pep hini (ha me ! ha me ! ha me !) gant eñvorennoù bev ar

c'hamp-mañ ken buhezek ?
 Daoust ha ne vo ket kaset d'ar
 bed holl ar c'heloù mat 'Bev eo
 Breizh' gant ar filmoù Gaumont ?
 gant ar Skingomz ? ...
 ha da biv e tleomp ar burzhud-
 se ?

nemet da Camp Bloaziel Etrevro-
 adel ar Vrezhonegerion ?

TRI GER DA GLOZAÑ
 (klevet er c'hamp)

- Anat eo ez out a Wened/awenet ?
 (Yellen da abEnnez)
- Ur Z hep H zo evel ur c'horf
 hep ene. (Yann Talbot)
- Un H hep Z ^{zo} evel ur blantenn
 hep jol. (ateb ur Gwenedour - ha
 n'eo ket Gwenedour)

Yellen




- Goût 'ouzout perak e ouz-
 on ne di ket-te da Camp log-
 ivi ?
- Nann ! Perak ?
- Echu eo !



EMBANNADURIOÙ ' GWENEDOUR '

(rumm 'E')



DA GOADMOC'HAN GWITIBUNAN

gant Y e l l e n

Ul levr a 65 pajenn, moulet
kaer ha skeudennet.


Priz : 5 F.

(kuit a vizoù kas)

Moulet ez eus bet bep a skouer-
enn evit an 200 rakprener.

Evit an hiniannoù n'o deus ket
rakprenet, e c'hellfont goulenn
al levr diganimp, rak tennet ez
eus bet 50 skouerenn ouzhpenn.

Arabat d'ar rakprenerion ad-
c'houlenn o skouerenn, miret
mat hon eus pep goulenn.



BARZHAZ -- HUD UR GWENEDOUR

gant a b E n n e z

1 1 0 pajenn

moulet kaer

Priz : 10 F.

(+ mizoù kas : 1,50 F)

Evit e stummeg (17 x 17) -

Evit kaerder e vouladur -

Evit studiadem Erwan GWEHEN

lakaet da raskrid -

Evit an danvez -

Evit ar yezh -

Evit ampartiz an oberour -

Evit an teir sonenn toniet gant

Yellen, notennet kaer ha helemn.

e v i t s e, eo ret da bep

hini prenañ e skouerenn eus al
levr-se.

E c'houlenn digant

GWENEDOUR - Arzhon.

E m b a n n a d u r i o ù

" G W E N E D O U R "

Rumm "B" : Brezhoneg Unvan
Rumm "G" : Brezhoneg Ereg
Rumm "A" : Keleier Arzhon
(e galleg)

komanant da bep rummad 5 F

Rumm "E" : Embannadurioù :

G. TOUBLANC :

Le Traité d' Union
de la Bretagne & de la France
(9 levrenn) 13 F
Le Druidisme 5 F

YELLEN :

Perc'hindour 5 F
Da Goadmoc'han gwitibunan 5 F
(kuit a vizoù)

ABENNEZ :

Barzhaz-Hud ur gwenedour 10 F
(+ 1,50 F a vizoù-kas)



G w e n e d o u r Mensuel

CPPAP 41 411

- Dépôt Légal Effectué -

Directeur & Imprimeur :

H. Hillion 56 Arzon

C C P Rennes 120-68

Pep gwir miret strizh